

ISTORIOU

TENNET EUZ AR SKRITUR-SAKR

gat an Tad BERTHE, Redamptorist,

LAKEAT E BREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSOUN BANNALEC.

EIL VAR N'UGENT LEORIK :

Hent ar C'halvar

Daou vennek.



NEUVILLE-SOUS-MONTREUIL

IMPRIMERIE NOTRE-DAME DES PRÉS

ISTORIOU

TENNÉT EUZ AR SKRITUR - SAKR

gat an Tad BERTHE, Redemptorist,

LAKEAT E BREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSOUN BANNALEC.

EIL VAR N'UGENT LEORIK :

Hent ar C'halvar

Daou vennek.



NEUVILLE-SOUS-MONTREUIL

IMPRIMERIE NOTRE-DAME DES PRÉS

APPROBATION DE MGR LAMARCHE

ÉVÊQUE DE QUIMPER ET DE LÉON.

ÉVÊCHÉ
DE QUIMPER
ET DE LÉON

Quimper, le 25 mars 1892.
En la Fête de l'Annonciation
de la Sainte Vierge.

IMPRIMATUR.

C. LELEUX, Vic. Cap.

Arras, 15 Août 1892.


Cher Monsieur le Curé,

Les Récits Bibliques du R. P. Berthe, Rédemptoriste, obtiennent un grand et légitime succès. Ce sont des résumés substantiels et admirablement faits de l'Histoire de l'Ancien et du Nouveau Testament.

Vous avez eu la pensée et je vous en félicite, d'en faire bénéficier notre pays Breton qui y trouvera un complément très utile du beau livre *Testament Coz ha Testament Nevez*. Je ne puis donc que vous encourager grandement à poursuivre votre excellent travail de traduction, qui, pour une part très sérieuse, servira les intérêts de la Foi et de la Langue Bretonne dans notre pays.

Croyez, cher Monsieur le Curé, à mes sentiments d'affectueuse estime et d'entier dévouement.

† THÉODORE, Evêque de Quimper et de Léon.



HENT AR C'HALVAR

I.

AR JUZEVIAN A BOURCHAS PEP TRA EVIT
MARO JEZUS.

N'euz nemed ar broiou gouez a ne ve lezet enno eun amzer etre ar varn hag ar maro. Er broiou all, e vez roet d'an torfetour eun nebeud derveziou. E Rom, e vije roet dezha dek dervez. Ar Juzevien ive, hervez ho lezennou, ne dlient lakaat d'ar maro, nemed er penn diyeza euz an deiz, goude kuz-heol. Mez, evit Jezus peb lezen great gat an dud a dlie beza torret, evit rei da anaout d'an holl oa lakeat d'ar maro gat tud ag a vage en ho c'haloun, n'e ket eur gassouni direiz, mez eur gassouni c'hoezet gat an ivern. Kerkent a m'en devoue Pilat her c'hondaonet, oue mall gatha her lakaat etre daouarn prised ar veleien. Ar re-zê a gargas da regli an heur ha ke-

ment a ioa red evit he staga ouz ar groaz. Dioc'h-tu, emezho, e ranket he gass d'ar maro. Amjest oa gortoz goude goueliou Pask. Rak ar bobl a zo edro. Goude beza goulennet maro Jezus a bouez-penn ha gat forz kriadennoù, piou a lavar ne deuio ket ar bobl-se diskiantet da grial adarre a-benneiz dervez: Hosanna da vap David. E leac'h ho diarben ha miret outho de ober eun injustiss, Pilat en doa mall ive da velet an affer-ze echu, ha da velet e tiskenn er bez an den hen deuz lakeat d'ar maro, dre aoun rak ar bobl. Ar maleuruz !!

Jezus oue kasset euz an dribunal da borz ar pretoar. Eno e tliet pourchass peb tra evit he varo var ar groaz.

Ar pevar sklav, karget da ober ar micher a vour-reo, a zistagas, a-frapp, divar he ziouskoaz ar vantel skarlat a ioa bet guisket dezha, hag a zigoras adarre he c'houliou. Guiska a rejont neuze dezha he zillad, en eur c'hoapaat, en eur vallozi, en eur lavaret a bep seurt farserez divalo. An oan divlamm-ze a c'houzanvas eb en hem glemm. He gurunen spenn oue lezet gatha var he benn, evit kaout tro d'he c'hoapaat var he galite a roue ha da lakaat ar bobl da c'hoarzin dezha. Evit hen diskar izella ma c'hellent, mistri ar bobl a dennas a brizoun daou dorfetour, daou laer kondaonet d'ar maro nebeud derveziou araok. Evit ober dismegans da Jezus, e fellas dezho ho staga ouz ar groaz en he gichen. An teir groaz-se, fardet evitho, a rankent c'hoaz da zougenn bete tachen ar maro. Great oant gat daou dreust. Unan en doa ugent troatad hag an hini-treuz en devoa dek. Eur zamm pounner oa evit hor Zalver, a ioa e paouez koll kement a c'hoad,


goude kement a skuisder hag a boaniou, ha dreist pep tra, goude an taoliou skourjez hen devoa bet en noz tremenet. Teuler a rejot ar groaz-se, a-frapp, var he skoaz; teuler a rejot varnha ar groaz mezuz-se a vije lakeat da vervel varnhi ar sklaved, an dud a vuez fall, al laeron, ar vuntrerien hag ar re a rea skrijou faoz. Jezus ne lavaras ket an disterra komz : mez he zaoulagad a baras gat karantez var ar c'hoat-ze a zismegans a deuio, hirio memez da veza eur c'hoat presiuiz dreist ar re all, koat Redamptor ar bed, preiz ar viktör, goalen roue an holl rouanez.

Pa z'eo pourchasset peb tra, an tri zen kondao-net a zo kasset gat ar vourrevien beteg ar blassen vraz. Eno, peb hini a dlüe kémeret he renk. Ker-kent a m'ho gueljoint e tont, an torrad tud anter gouez a ioa var an dachen a zirollas da grial a bouez penn : « D'ar maro ! d'ar maro ! » hag e tiskuezent gat ar biz en eur c'hoarzin an hini a ioa, var he veno, ar Messias, e kreiz etre daou laer !

An drompill a zonas da ziblass hag an arme-ze a dud dall a laka ho Doue d'ar maro a en hem laka en hent. Er penn-kenta, eur c'hrier publik a embanne, dre ma zeat, hanoioù ha torfejou an dud keiz a ioa e vont da veza staget ouz ar groaz. Goudeze, e teue ar zoudarded romen karget da zerc'hel urz vad ed ar ruioù ha da gass ar bobl divar'n hent. Varlerc'h e teue eun toullad goazed ha bugale a zouge, lod kerdign, lod skeulioù, lod all tachou, morzolioù hag ar skrid a dlüe beza staget ouz ar groaz, a zioud penn ar C'hrist. An daou laer a deue goude-ze hag erfin e teue Jezus, he dreid noaz ha leun-c'hoad, daou-bleget dindan ar bouez euz he groaz.

Orjella' ra, bep gammed, evel eun den e vont da zempli. Ber varnha, goloet a c'hoezen, dare gat ar zec'hed, e talc'h he groaz var he skoaz gat eun dourn ha gat egile e sao'he vantel hir a goueze etre he dreid. He vleo a ioa fuillet ha diskempen, dindan an drein sanket en he benn hag a c'holoe he dal a c'hoad. He ziou jot hag he varo leunive a c'hoad, her lakea en eur stad ken dishenvel dioc'h araok, ma na ellet ket mui hen anaout. Ar vourrevien a zalc'he mad d'ar c'hêrdign stag ouz he c'houriz. Avechou hen diarbennet; avechou all, e skoent varnha evit ober dezha mont araok. Ne vije ket great goassoc'h da eul loan mut. Jezus, evel eun oanik divlamm a gasser d'ar gigerez, a c'houzaon pep seurt dismegans eb ober eur glemmaden. Var ar vizaj-se bronduet, peb hini en dije gellet lenn : Hema'zo eun tenzor a garantez hag a zentidigez evit Doue he dad.

En-dro dezha, e vode he adversourien touet, ha kounnar braz enno : prined ar veleien, ar re goz, ar Farizianed a ioa bet stanket ho ginou dezho ken aliez a veach gat ar profed braz. Mall o devoa da deuler var Jezus ar zac'had kassouni ha bilim a ioa var ho c'haloun. Dont a reont an eil var-lerc'h egile da gaout Jezus. He c'hoapaat a reont; ober a reont dezha peb seurt dismegans ha c'hoarzin a reont dezha divar benn he viraklou. — Goudeze e teue eur c'hantener var varc'h, evit derc'hel kabestr d'an toullad tud iskiz a deue varlerc'h : sklaved, micherourien, tud euz an disterra, a ioa abaoe ar mintin e ioual var ar blassen. Brema e zeont d'ar red d'ar Golgotha. Sec'hed goad o deuz!



II.

HENT AR GOLGOTHA.

An hent a ranket da ober a ioa diskoumpes, meinek ha kam-digam. Daouzek kant paz a ioa da ober. Red oa disken divar torgen an templ bete traoñ kear, ha pignat ac'hano-bete dor ar justissou hag ar Golgotha. Rak var ar Golgotha e thient beza savet ouz ar groaz, en dianveaz da gear. Hent ar Golgotha! c'hui a zo eun hent a boan hag a c'hlac'har, abaoue m'en deuz Jezus douget dreizoc'h he groaz gat kement a boan. Rak gat guirionez en deuz gellet lavaret : « C'hui holl, tremenidi, lavarit d'in-me ag en a zo eur c'hlac'har par d'am hini-me! »

Hent ar Golgotha a zo ive eun hent a driomf; rak guelet e deuz e tremen brassoc'h ha galloudusoc'h eget kement impalaer a zo bet e Rom e pignat var ar C'hapitol. An dud a vrezel-ze a zo uzet ho hano. Mez hent ar Golgotha ne vèzo morse kollet. Euz kement roud avel a zo, diskibien Jezus, a deui da Jeruzalem da heuil, paz ha paz, an hent great gat hor Zalver; dont a reint da veska ho daelou gat ar boultren distrempet gat he c'hoad, ha da brederia epad eun nebeud amzer var ar burzudou c'hoarvezet en hent-se, hirio hent santel.

En eur guitaat palez Pilat, an dud a ziskennas, divar torgen Moriah, varzu kear, dre eur ru striz hag a droe d'ar c'huz-heol. — A-benn daou c'hant paz, ar ru-ze a groas gat eun all ledannoc'h, hanvet ru Efraïm. Araok erruont er c'hroaz-hent Jezus a blegas dindan ar zamm hag a goezas d'an douar, a stok he gorv. Ar vourrevien a gave eno adarre an dro d'he oual-gass hag ar Farizianed d'he c'hoapaat. « An den-ze, emezho, a rea kement a viraklou, a eeune ar re gamm, a baree an dud seizet.. n'e ket zo-ken evit chomm en he za he unan ! Petra'ell beza eta an den-ze nemed eun trompler ! »

Gouskoude, sikouret gat ar zoudarded hag ar vourrevien, Jezus a zammas adarre he groaz hag a boursuas he hent, douss bepred, mez he zaoulagad beuzet en daëlou. Setu a-ze, kristenien, ho skouer ; rak c'hui ive o pezo ho kroaz da zougen en draoñnien-ma a zaelou.

E ser anter kant paz a ioa great var ru Efraïm pa veljot pe adra da ranna ar galoun. Eur vaqueuz, gragez euz he anaoudegez en-dro dezhi, a c'hortoze Jezus da dremen. Mari oa. Mari, he vam, a felle dezhi her guelet eur vech c'hoaz a-dost ha lavaret dezha kenavo. An noz hag ar mintinvez e doa tremenet er brassa anken. Bep moment, Iann, an diskib muia karet, a deue da zigass kelou d'ar vam glac'haret euz an traou euzuz a reat an eil goude eben abaoue an anter-noz. Digass a reas dezhi ar c'helou oa barnet Jezus gat ar Sanhedrin, oa bet dirak Pilat hag Herodez hag erfin oa kondaonet d'ar maro. Pa glevas ar c'helou-ze, Mari a guiteas an ti ma oa enna, hag a deuas var dachen ar pretoar gat Madalen hag ar gragez santel. Eno

e klevas ar bobl e vlejal, e velas Pilat en he gador e tiskoez d'an dud he map leun-c'hoad ha kurunet a spenn. He c'haloun a ioa beuzeter c'hlac'har hag he daoulagad en daelou. Gouskoude e fellas dezhi c'hoaz mont da heul he map beteg ar Golgotha ha gouzañ eno gatha eur verzerenti didruez.

Pa zavas ar bobl da heuil Jezus, Maria ziskennas dre eun hent a-goztez, beteg al leac'h ma kroaze an hent-se gat hent Efraïm a ioa dija barleun a dud.

Pebez anken evit Mari, er moment-se ! Guelet a ra e tremen dirak he daoulagad ar c'hrier ec'h embann ar pezh a lavaret torfejou he map, ar zoudarded, mevelien ar vourrevien gat an tachou, ar morzoliou, an durkez..., var ho lerc'h, daou laer hag erfin Jezus gat he groaz. He vizaj a ioa droulivet : goad a ioa var he zaoulagad hag he vuzellou a zo dizec'het. Kerkent, Maria lamm varzu enna, digor gathi he divrec'h evit he vriata. Mez ar zoudarded, ar vourrevien didruez a daolas anezhi a-dreñ, gat imor. Jezus a jommas eun tachadik a-za. He zaoulagad a gav daoulagad he vam. Gat eur zell a deneridigez e ro dezhi da anaout petra a dremene neuze en he galoun ha pegement a joa en devoa evit ar pezh e devoa great evitha. Ar vam geaz ! Krena'ra. Mankout a ra he c'haloun dezhi. Sempla' reas. Koeza' reas etre divrec'h ar merc'hed a ioa en-dro dezhi. Kloza' reas he daoulagad ; mez klevet a rea ar c'homzoù fall ha diskiant a laosket a enep ar map hag ar vam. Ar bobl a ziroll eno a vole-vant hag a laka fin d'an abaden-ze.

Ugent paz pelloc'h, oue kuiteat ru Efraïm evit kemeret an hent a iea rak-eeun d'ar Golgotha. Ar

ru-ze a ioa gathi kalz sao. An dra-ze a greskas skuizder hor Zalver hag hen dinerzas. Setu perak, a veac'h en doa koumanset da bignat ma savas varnha liou ar maro : He zaoulin a blege dindanha. Ne elle mui, kaer en doa, stleja he groaz. Pa velas ar Farizianed edo e vont da vankout, e savas aoun gatho. Rak ne felle ket dezho dioueret ar blijadur da velet Jezus var ar groaz, en he angoni. Pedi a rejont eta an offiser romen da glask eun den da zikour Jezus da zougen he zamm. An offiser a gassas soudarded da glask unan bennak. Kaout ha digass a rejont gatho eur jardiner a ioe tont euz he bark, he hano Simon Sirenean, hanvet evel-se abalamour ma zoa ginidik euz Sireen, en Afrik. Ober a rejont dezha mont a-dreñ Jezus, da zougen eul loden euz he groaz. Simon a ranke mont dre-forz. Rak n'oa ket brao enebi ouz eur zoudard romen, petra bennak a vije gourc'hemennet gatha. Buhan aoualac'h e koueze an taoliou var ho kein.

Simon ne zaleas ket da c'houzout pebez grass ha pebez henor a rea dezha an aotrou Doue. Kemeret a ra truez ouz an den-ze goal-gasset, broustet, malet gat ar skuizder, hag a zeblante goulen sikour digatha. Kemeret a reas eta dre greiz ar post pounner a ioa var skoaz hor Zalver, en henvelep fessoun ma ne lez varnha nemed an nebeuta pouez. Jezus ne ankounac'heas ket an akt a drugarez a reas dezha an den-ze. Ar Sirenean a deuas divezatoc'h da veza unan euz he ziskibien hag he zaou vap Aleksandr ha Rufus a ioa bet daou abostol euz ar guir feiz.

En eur c'hervel tud d'he zikour, Jezus a zeske d'eomp e savete ac'hanomp, evit guir, dre ar groaz;

mez e zeo red ive d'eomp dougen hor c'hroaz d'he heul.

Daou c'hant paz a rejot adarre er ru-ze ledan hatiez pinvidik ennhi dioc'h an daou du. Divar an trujou, an dud a vele dizeblant pe gat disprijans ar re a ioa e vont d'ar maro. Setu, souden, eur vaouez a galite a zilamm euz he zi, hag eb ober van euz ar zoudarded a ia bete Jezus. Eur moment, e sell ouz ar mestr divin. Guelet a ra he vizaj goloet a bri, a grainch, a c'hoad.

Tenna ra neuze he voal divar he fenn hag e sec'h gatha he vizaj da Jezus. Jezus, gat eur zell, he zrugarekas hag a boursuas he hent. Peger man-tret, peger laouen n'oue ket ar vaouez-se, en distro d'he zi, pa velas var he lienen fas divin hor Zalver! He vizaj oa, evel ma devoa he velet. An diskibien a roas dezhi an hano a Veronik¹, evit derc'hel sonj da viken euz an akt a drugarez e doa great ar vaouez dispount-se.

N'oa mui nemed eur c'hant paz bennak da ober evit erruout gat an or hanvet dor ar Justissou, abalamour an dud kondaonet d'ar maro a ranke tremen dreiz-hi gat ho c'hroaz. An hent a ioa meinek hag ar zao'a ioa tenn. Kaer en devoe ar Sirenean sikour hor Zalver guella ma c'helle, Jezus a goezas adarre dindan ar zamm euz he groaz. Gat kalz poan e savas en he za hag e tosteas ouz an or. En eur dremen, ec'h ellas lenn edo e vont d'ar

¹ Ar c'hreg-se a ioa Serapia he hano. Epad m'edo Paul e persekuti ar gristenien, Santez Veronik a guit as douar santel ar Palestiin gat he zenzor presiuz. An imaj-ze a zo en Iliz Sant Per, e Rom, e touez ar relegeier kaerra.

maro var digarez en doa lakeat ar bobl d'en-hem zével a enep Sezar ham'hen doa lavaret oa ar Mesias. Ne vankas ket ar Farizianed da ziskuez dezha gat ar biz ar skrid udur-ze ha da rebech dezha anevéz an torfejou a ioa tamallet dezha. En eur vont er-meaz a Jerusalem, mallozet gat ar bobl. Jezus a zonje gat karantez, en he galoun, er pèz oa e vont da ober; sonjal a rea edo e vont da zavetei ar bed.

Guechall, al loan dibabet evit ar sakrifiks, a vije sammet varnha holl bec'hejou hag holl malloziou Israel. goudeze, e veze kasset er meaz euz ar c'hamp-evit beza lazet. Jezus, ar guir viktim, ha ne oa ar viktim all nemed eur skeud, a dremenas dre zor kear, karget a dorfejou ha malloziou ar bobl. Ar vourrevien a zo e vont d'her lakaat d'ar maro er meaz euz ar c'hamp, da lavaret eo, er meaz euz ar gear zantel; hag he c'hoad, evel goad an oan euz al lezen goz, a zo e vont da oualc'hi, da bufria ar bobl, an Aoter hag ar Santual.

Kerkent a ma zeo eat e meaz kear ema e c'harz ar Golgotha. Kaer a ioa bet ober difen da ouela var stad ar re a iea d'ar maro, eun toullad merc'hed kalounek ne eljont ket miret, pa dremenas Jezus, da ouela, da grial ha da hirvoudi, ker braz oa ho glac'har! Meur a hini a ioa ho bugale gatho var pleg ho breac'h hag ar vugale-ze a ouele ive gat ar vam. Jezus ne ell miret da druezi outho. Guelet a ra ar reuziou estlammuz a zo e vont da goeza var Jerusalem, kear dallet ha dianaoudek; hag e lavar d'ar gragez santel glac'haret: « Merc'hed Jerusalem, ne ouelit ket varnon-me; mez ouelit varnoc'h oc'h unan ha var ho pugale. Rak setu erru an deiziou ma livirint! » Euruz ar gragez a zo eb bugale

hag an divron n'o deus ket maget. Neuze e vezo kriet d'ar meneziou: « Koezit varnomp: ha d'an torgennou: Goloit ac'hanomp! Rak ma vez great kement d'ar c'hoat glaz, petra-vezo great d'an hini seac'h! »

C'huac'h dervez araok, divar gern menez Olivet, Jezus a skuille daelou puill var Jerusalem hag a lavare e vije distrujet. Hirio brema, pa z'eo guir e deuz Jerusalem diskuezet kement a ingratiri, goude m'he deuz dikuezet eur galoun ker kriz, ker kalet, Jezus, d'he dro, a deu da ziskleria dezhi a vouez huel eo dilezet gatha hag e koezo varnhi eun taol spountuz ag he c'hasso da netra. Pa glevas mistri ar bobl ar c'homzou-ze, e tlejent beza krenet gat an enkreiz. Hogen, dallet oant gat ar gassouni a ioa bet c'hoezet gat Satan en ho c'haloun; hag ar gourdrouzou great gat ar mestr divin ne rejont nemed kreski ho c'hounnar.

Ar vourrevien, poulzet gatho, a sko varnha go-assoc'h-goaz. Setu Jezus, kasset evel eul loansamm, dinerzet-holl, a goez evit an drede guech, var ar vein, araok erruout var gern an dorgen. Ar Juzevien he vressas dindan ho zreid ha krainchad a rejont oc'h he vizaj.

Goudeze e c'heljot he zével adarre hag he dreina, he stleja anter-varo beteg al leac'h merket evit he groaz. Ar bobl udur-ze a deu neuze da voda en dro d'an dorgen, en-dro d'ar Golgotha, evit blasaat poaniou diveza he Doue ha kaout joa en he varo.

Ar c'huac'hved heur euz an deiz a zo e vont da zini, heur solanel! An Env hag an douar a zo sioul e c'hortoz. Istor glac'haruz an Den Doue a zo e vont da echui.



III.

AR GOLGOTHA.

N dorgen reier a dlie beza savet varnhi kroaz hor Zalver, a ioa daou-c'hant paz dioc'h dor ar Justissou. En hebre, he hano oa Golgotha, da lavaret eo leac'h an *em-penn*. Ar skrijou koz a zesk d'eomp oue roet an hano-ze dezha, e memor euz a eun dra vraz meur-béd. Setu ama.

Tri mil bloaz araok Jezus-Krist, eun den kroumet dindan ar beac'h euz he vlaveziou hag euz he drubuillou, a deue da vervel var an dorgen-ma gouez ha dirempred. An den-ze oa Adam, tad kenta an holl dud. Taolet kuit euz ar baradoz, en doa bevet nao c'hant vloaz er binijen hag en daelou. Eurusedd he amzer genta, re vuhan, siouaz ! tremenet, a reas dezha santout rustoc'h c'hoaz ar malloz laosket gat Doue varnha ha var he vugale. Red oue dezha digeri an douar ha drebi he vara dioc'h ar c'hoezen euz he dal, ha kaout poaniou en he gorv dre bep seurt klenvejou. Red oue dezha mougá dré ar binijen tan an ioulou fall savet en he ene ; red oue ouela da heul ar pec'hed var bugale kabluz a dec'he dioc'h ho zad pe en hem laze entrazho, Red oa dreist-holl, klevet bepred mouez

an Aotrou Doue, mouez spountuz, o lavaret dezha :

« Adam, mervel a ri abalamour ma c'heuz pe-c'het. » Adam, gouskoude, pegement bennak a boan a ioa koezet varnha ha pegement bennak en doa da c'hortoz, ne zizesperas morse. Er moment-chou a anken, e sonje e Doue, en Doue-ze made-lezuz en doa promettet dezha he zavetei, hen liag he vugale, dre unan diskennet euz he ouenn hag a vije hanvet Redamptor. Doue en devoa her lavaret dezha en deiz ma kassas anezha kuit euz ar baradoz ; ha Doue ne ell ket mankout d'he c'her. Evelse, euz an eil rumm d'egile, oa aketuz da lavaret d'he vugale kaout bepred fizians en Hini a dlie dont. Pa velas ar maro dirazha, ar maro-ze a vele ar skeud anezhi abaoue kement a vlaveziou, ec'h adoras justiss Doue hag en hem roas d'he gousk diveza, eb anken, goude beza saludet eur vech c'hoaz an Hini a dlie beza treac'h d'ar maro ha delivra he vugale a dre daouarn Satan.

Bugale Adam a zebelias ho zad e kostez ar menez-se. Mez var an dorgen huella e rejont eun toull er roc'h evit lakaat he benn. Setu perak oue hanvet al leac'h-se Golgotha, da lavaret eo, al leac'h ma zema ennha penn hon tad kenta.

Eno var an duzien-ze, var ar roc'h-se, ar vour-venien a stlejas an eil Adam, Map Doue, evit prena an den a deu da veska he c'hoad divin gat relegou Adam goz, ar pec'her reuzeudik en doa kollet he holl vugale var he lerc'h. Eur vezen, eun aval aviuz, en doa kollet an den kenta ; Jezus ive a zoug eur vezen bete menez kalvar, eur groaz pounner, Guezen ar binijen. Dirak guezen baradoz an douar, Adam en devoa dizentet ouz Doue. Var benn an

den-ze, revoltet a enep Doue, e vezo savet kroaz ar sklaved ; hag evit paea da Zoue an tad ar boan dleet d'ar pec'het, he Vap sentuz bete mervel euz ar maro euzussa, a varvo var ar c'hoat-se.

Pa erruas var dachen ar maro, Jezus a oue great dezha evel m'oaat kustum da ober, da lavaret eo, oue goal-gasset.

E touez ar Juzevien, edo ar c'hiz da rei d'an dud keiz-se eun evaj kreñv evit terri ho zec'het ha kreski ho nerz. Gragez a galoun-vad a brepare an tassad-se hag ar vourrevien he c'hinnige dezho araok ho staga ouz ar groaz. Lakaat a rejot etre daouarn ar vourrevien an evaj mesket gat guin ha mirr evit soulaji Jezus. Hogen an dud-se, kriz ha fallagr, a drenkas an evaj-se en eur lakaat ennha ar vestl c'huero. Jezus a zoubas ennha he vuzellou evit tanva peger c'huero oa, ha goude, ne fellas ket dezha mui kemeret anezha, pegement bennak a zec'het en devoa. Hor Redamptor en devoa great he zonz da c'houzaon, eb klask an dis-terra distan d'he boaniou.



IV.

STAGA A REAR JEZUS OUZ AR GROAZ.

ARDRO ar c'huec'hved heur (krestreiz) e koumansas labour ar vourrevien. Sailla a rejont ho fevar var Jezus evit tenna digatha he zillad. He zae a ioa staget gat ar goad oc'h he gorr dispennet. Ar re-ma a reas varnhi eur frappad, ken na zigoras he holl c'houlou ; hag hor Zalver a apparissas dirak an dud-se gat eur vantel ruz, mantel a roue, mantel he c'hoad.

He vourrevien hen astennas var ar groaz evit he staga. Er moment-se, ne vije ket klevet eur ger. An dud a ioa sioul ha tro ho daoulagat gatho var Jezus. Mall o devoa d'her c'hlevet e krial ha d'her gulet e poan. Unan euz he zivrec'h a oue astennet da genta var eur post euz ar groaz. Ar vourrevien all a ouaske var he gorr evit miret outha da finval, epad ma oa unan anezho gat he vorzol e skei taoliou pounner var eun tach braz a iea a dreuz he zourn beteg an treust. Ar goad a zaillas ; an nervernou en hem grizas. Jezus, he zaoulagat leun a zaelou, a reas eun huanaden.

Endourn all oue sanket ive eun tach. Pa zeo stag he zivrec'h, ar vourrevien a jach euz ho holl nerz var he gorr dismantret evit he asten var ar

groaz. Taoliou morzöl a gléver adarre, ha prestik he zaou droad a zo ive stag.

An taoliou morzöl a rea d'hor Zalver klemm, d'ar merc'hed santel diroll da ouela, ha d'ar Juzevien krial a bouez-penn evel loened gouez. An trouz-se a iea bete kaloun Mari hag a rea dezhi gouzañ eur guir verzerenti.

Pa oue staget Jezus, ar vourrevien a zavas ar groaz en he za evit he diskuez d'ar bobl. Epad ma zoa lod krög e brankou ar groaz, re all a dostea he zroad oc'h an toull a ioa great er roc'h, var beg ar C'halvar. Eno e plantont ar groaz en eur fessoun digernez. Ar strounss a lakeas he eskern da steki an eil ouz egile ha da strakal. Gouliou he dreid hag he zaouarn a zigoras. He c'hoad a redas adarre ha gat ar goad e tec'he he nerz. Jezus a zoublass he benn. A-dreuz he vuzellou korn-zigor e velet he deod dizec'het. He zaoulagad ive a ioa anter-varo.

Pa oue gullet hor Zalver savet etre an eñv hag an douar, an dud, a bep tu, a zirollas da ioual ha da vallozi. « Malloz, emezho, d'an hini a zo stag ouz ar groaz, » d'an hini en deuz meritet mervel evel ar sklaved.

An daou laer, digasset assamez gat hor Zalver bete menez Kalvar, a oue evel dha staget ouz ar groaz. Lakeat ouent, unan a zeou-dezha hag eun all a-gleiz hag evel-se e tennas da vir lavar ar profed : « Lakeat eo bet var ar memez renk gat ar falla torfetourien. »

Epad m'edo ar bobl e sellet ouz ar c'hroaziou-ze, ar vourrevien skuiz gat ho labour a deuas da azeza e c'harz kroaz Jezus evit ranna he zillad entrezho. Rak hervez al lezen an dillad-se a deue dezho. Ober

a rejont peder loden anezho evit ma c'helje peb hini kaout unan. Hogen, evel ma zoa he zae eb gri, en eun tamm adalek an neac'h beteg an trañ, e kavjont guelloc'h he lezer en he fez, ha c'hoari d'an dissou evit gouzoud da biou e vije. An dud-se ne ouient ket e zoa an traou-ze holl merket er Skritur sakr, hag en devoa eur profed lakeat ar c'homzou-ma e gincu hor Zalver : « Rannet o deuz entrezho va dillad, ha var va zae o deuz tennet d'an dissou. » Doktored ar Sanhedrin, tud ag a dlie beza desket mad var ar Skritur, a elje beza deuet da zonj dezho euz an traou-ze pa velent anezho e seveni brema, ger evit ger. Mez ker laouen oant da veza great ho zaol traitouriaj ma ne jommé ket a blass en ho c'haloun da eur zantimant just hag honest.

Eun dra zister aoualac'h a lakeas gouskoude eun nebeud troublen en ho eürusted. Ar zoudarded o devoa lakeat var ar groaz, a-zioud penn hor Zalver, eun tamm skrid great gat Pilat e unan. Eno oa merket ar c'homzou-ma : « Jezus a Nazareth, Roue ar Juzevien. » Pilat a rea eun dismegans vraz d'ar Juzevien. Evit tenna venjans var an dud-se o devoa digasset dezha eun den divlamm da varn, ar gouarnner romen a ioa fellet dezha splana, dirak an holl, e zoa gouskoude ho roue, kaer o doa, an den milliget-se, an torfetour-se o doa lakeat kondaoni d'ar maro. Evit ma c'helje an holl dianvezidi, deuet a vilierou da Jerusalem evit goueliou Pask, gullet ar goaperez-se, oue lakeat ar skrid e tri langaj : Hebre, Grek ha Latin. Prinsed ar bobl, pa velont ar skrid-se, a vennas koll ho fenn. Kass a reont kan-nad da Bilat da lavaret dezha ema ec'h ober goap euz ar bobl ha da c'houlèn ma vezo chenchet ar

skrid evel-hen : « Jezus a Nazareth, hen deuz lavaret oa roue ar Juzevien. » Kaer o devoue klemm ha gourdrouz, Pilat a respountas dichek :

« Ar pezh a zo skrivet, a zo skrivet. »

Kaifaz en doa lavaret e tlie eun den mervel evit an holl bobl. Brema Pilat a skriv e zeo an den-ze staget ouz ar groaz, eo ar Messias gortozet gatho, ho Roue, ho Redamptor. Hen embann a ra e langaj an tri bobl kenta euz ar bed, evit ma teskint d'an holl e tevio da veza, an den-ze maro var ar Golgotha, roue ar bed holl hag e vezo divar lein he groaz mestr d'an holl boblou euz an douar.

Pilat en doa lakeat drouk braz er Juzevien. Evel ne ellent ket kaout ar skrid a c'houlennent, en-hem lakchont da vlassfemi ha da c'hoapaat Jezus divar bepenn he ditra roue. Tud ar c'honseil braz, prinsed ar veleien, ar skribed, ar re goz a ioa er penn araok.

« Petra, emezho, en eur c'hoarzin goap, savetei a ra ar re all ha ne hell ket en hem zavetei he unan? Ra ziskennno euz ar groaz, ar Messias-ze, ha ni a gredo ennya. Lavaret a rea oa map Doue. M'ar deo map Doue, ra zeui Doue brema d'hen delivra ! »

Ar bobl, da heul he vistri, ne vankas ket ken nebeud da vlassfemi. Mont ha dont a reant dirak ar groaz hag e lavarent en eur ija ho fenn ha gat disprijans :

« Guelomp' ta ! Te a ziskar an templ hag a zao anezha e tri dervez ; diskenn eta euz ar groaz, m'ar gellez, hag en hem zavete da unan ! Mar doud map Doue, diskenn euz ar groaz ! »

Ar zourdarded ho unan, daoust ma zoant boazet

da ober ho labour eb lavaret ger, a zao ho mouez ive gat ar re all, ker ouaz hag hi.

« Roue ar Juzevien, emezho, guel eta brema a te a ello tec'het diganeomp ! »

Hogen, ne ket en eur ziskenn euz ar groaz e tlie mab Doue diskuez e zoa roue, mez en eur jomm stag outhi evit ober penn-da-benn œuvr kaer ar Redampson. Jezus a glevas ar c'hri, ar blasfemou, ar c'homzou sakrilaj. He zaoulagat, beuzet en daelou, a zellas eur moment ouz ar bobl diskiantet-ze hag evit ar vech kenta e komzas abaoe ma zoa pignet var ar C'halvar.

« Va zad, emezha, pardonit d'an dud-se ; rak ne ouzont ket petra reont. »

Pebez trugarez a-berz hor Zalver ! Goulen a ra pardon evit he vourrevien, hag evit kaout essoc'h a-ze ar pardon-ze, e timinu ar faot. « Ne ouzont ket, emezha, petra'reont. »

A forz da glevet blasfemou ar Juzevien, setu unan euz al laeron stag ouz ar groaz e kichen hor Zalver, a dro varzu ennya divergont hag a zizac'h a bep seurt falz pedennou en he enep. « Guir eo, emeza, ar pezh a lavar an dud-ma ; m'ar d'oud ar C'hrisat map Doue en hem denn ac'han ha tenn ac'hanomp ganez. »

Mez he gamarad laer a ra dezha rebechou : « Ne c'heuz ket eta doujans evit Doue, emezha. Perak ober poan da eun den ag a zo kondaonet evel dod. Ni, da vihana, barnet evit hon torfejou, a reseo ar pezh a zo dleet d'hon oberiou. Mez an den-ma a zo divlamm. »

En eur gomz evel-se, al laer a zantas evel eur jenchamant vraz en he ene. Reseo a ra sklerijen

digat Doue hag e c'hanavez e zeo e guirionez Jezus map Doue hag e varve var ar groaz evit pec'hejou ar bed. Sevel a ra en he galoun eur c'hlae'har vraz euz an torfejou en deuz great. An daelou a zao d'he zaoulagat hag e lavar gat karantez da Jezus : « Aotrou, o pezet sonj ac'hanon pa vezoc'h en ho rouantelez. »

Jezus a respountas dezha gat dousder : « Hirio memez, e vezoc'h ganhen-me er baradoz ! »

Selaou. Adam goz, euz a zindan roc'h ar Golgotha. — Selaou ha trid gat ar joa. — Setu ama ar Redamptor promettet d'id ha d'az pugale. Te, kasset kuit euz ar baradoz, a ello hen anaout diouz ar gomz-ma hen deus lavaret da unan euz da vugale :

« Hiri o e vezi ganhen-me er baradoz. »



V.

AN TEIR HEUR ANGONI.

D'ar c'hresteiz, epad m'edo an heol en he vrud, Jezus a ioa en he angoni e kreiz etre daou laer. An dud a vlasfeme en he enep. Her goapaat a reant evel Doue hag evel Roue. Ar Farizianed, prinsed ar veleien, an doktorred, ar re goz euz ar bobl, a vele gant dudi holl boaniou hor Zalver. Ar gragez santel, dalc'het adren gat ar zoudarded hag gat ar bobl egaret, a ouele dourek e kichen Mari, mam Jezus. Setu, en eun taol-kount, an env digoc'hen bete neuze, a denvalia. Koumoul du a zao var an heol hag an denvalijen a c'hounid a nebeudou menez ar Golgotha, kear Jerusalem hag ar bed holl. Deuet oa an noz misteriu a gomze anezhi ar profed Amos : « En deiz se, emezha, an heol a varvo da gresteiz ; hag ar vrasa tenvalijen a c'holoi ar bed-holl epad m'edo en he vrasa sklerijen. » Setu a-ze ar respount a rea Doue da gomzou diskiant ar Juzevien. Jezus ne ziskenne ket euz he groaz abalamour ma felle dezha mervel varnhi evit silvidigez ar bed. Hogen, goude eun niver braz a destou all, e teu unan, a n'oad ket var c'hed dezha, da embann oa Jezus guir Doue. An heol oa an test-se, ha mont a ra da guzet evit

ne roi ket a sklerijen da vuntrerien he Zoue. Kement a ioa er bed a zouge kaoñ d'an hini en devoa he grouet.

Kerkent, ar c'halounou a sklass gat ar spout hag an holl a davas evel pa vijent skoet gat ar maro. Ar bobl leun a enkreze a dec'h buhana ma c'hell en eur grena. Ar pennou braz, ho unan, dre ma seblante dezho gueleet eno venjans an Aotrou Doue, a ieas kuit an eil var lerc'h egile. Nejommas var ar menez nemed ar zoudarded romen o doa karg euz an tri-reuzeudik stag ouz ar groaz, ar c'hantener a ioa e koumandi varnho, eur vandenad bennak a dud o doa kalz nec'hamant e goeled ho c'haloun dre ma rea ho bro eun henvelep torfed, hag, erfin, ar gragez santel en-dro d'ar verc'hez Vari. Oc'h sklerijen ruz ar stered, e velet korv Jezus droulivet, he vizaj dislountret gat ar boan. He zaoulagad a jomme tro etrezek an eñv, hag he vuzellou korn-zigor a lavare c'hoaz eur beden evit he vourrevien.

Mam Jezus, n'edo ket mui ar bobl var he hent. Douget gat he c'harantez birvidik, e c'hell tostaat ouz ar groaz. En he c'hichen e teuas Iann, an diskib muia karet, ha goude, Mari Kleofaz ha Mari-Madalen, n'oa ket bet fellet dezho dispartia diouz ar verc'hez benniget. Mari-Madalen, beuzet en he glac'har, a goezas e c'harz ar groaz hag he bria-taas gat kalz daelou.

Neuze, Jezus a reas eur zell ouz an eneoù santel en devoa karet kement. He zaoulagad leun a zaelou a goezas var daoulagad he vam bepred troet varnha. Gueleet a reas merket var he bizaj ar verzerenti a c'houzaon en he c'haloun hag ar garan-

tez tener e devoa evitha. Gueleet a reas er-vad oa treuzet he ené gat ar c'hleze a c'hlac'har, en devoa komzet anezha an den santel Simeon, ouспен tre-gont vloaz a ioa. Ené he vam a vel treuzet beteg ar goeled ! Din eo Mari da gaout perz e mister kaer ar Redampson evel m'he doa bet he lod e mister dudiuz an Inkarnasion. Jezus a fellas dezha staga eun dra bennak c'hoaz ouz an testamant a garantez en doa roet diagent d'he ebestel. Goude beza en hem roet he unan, en devoe c'hoaz ar vadelez da rei dezho he vam. Iann, an abostol a ioa bet e repoz var he galoun d'ar iaou gamblid, a ioa brema e ouela e c'harz ar groaz. Ia ; ouela'rea d'he vestr mad. Petra bennak ma z'oa he dud beo c'hoaz, daoust zo ken ma z'oa he vam Salome en he gichen var ar C'halvar, e seblante dezha beza er bed-ma evel eun den emzivad, disparti m'a z'oa dioc'h Jezus, Doue he galoun. Jezus ne velas ket eb teneridigez daelou he vignoun mesket gat daelou he vam. — Lavaret a ra eta d'ar Verc'hez santel en eur ziskuez he abostol :

« Maouez, setu a-ze ho map ».

Ar map nevez-se roet da Vari e kreiz an daelou oa an holl gristenien prenet gat goad Jezus-Krist. Eva, hor mam genta, e doa digasset ar maro ; Mari, eil Eva, hon eil mam, a zigass d'eomp ar vuez. Mari, pa glevas komzou Jezus a zantas he c'haloun e ledannaat hag e leuna a garante hag a drugarez evit holl bugale an dud.

Jezus neuze a dro oc'h Iann hag en eur ziskuez dezha gat eun taol lagad he vam glac'haret e lavar :

« Va map, setu a-ze ho mam. »

Adalek an deiz-se, Iann a gemeras Mari evit he

vam hag a reas dezhi kement a stad evel pa vije bet e guirionez he vam.

Goude beza roet dezho an tenzor diveza-ze euz he garantez, Jezus a zebantas kimmiada diouz an douar. En-dro dezha, epad teir heur, ne vije ket klevet an disterra trouz. Ar goardou strafillet a deue hag a iea eb lavaret ger. An offiser a ioa evel sounnet dirak ar groaz. Seblantout a rea kaout c'hoant da lenn e goeled an den-ze a zo e vont da vervel hag a zo ken dishenvel diouz ar re all.

Jezus, he zaoulagad tro etrezek an env, a bede he dad. Kinnig a rea dezha evit an holl, hag evit pep hini, he boaniou skrijuz, an dismegans euzuz great dezha, ar goad a rede euz he c'houliou hag ar maro a ioa e vont d'her skei.

Setu he vizaj e tenvalaat. Eun anken spountuz a ouask he galoun. Ema eno, he unan, karget a dorfejou, mallozet gat an dud ; ema e vont da vervel var ar groaz etre daou laer. He ene a gemer heug ouz an douar hag a dro varzu an env. Mez, siouaz ! he lezer a rear he unan. Justiss Doue a dremenno var he vap, eb ma tiskenno eun eal d'he gonsoli ha d'he zikour. Vardro nav'heur euz ar vro, (teir heur goude kreisteiz) euz he galoun ankeniet e sao eur c'hri klemmuz :

« Eloi ! Eloi ! lamma sabacthani ? »

Ar pezh a zinifi :

« Va Doue, va Doue, perak oc'h euz-hu va dilezet ? »

Dre ar c'homzou-ze e koumans ar psalm 21. Ar roue David a verke, pell araok, trubuilhou an Den-Doue ha gulet en doa a spered angoni divezha map an den.

Gouskoude, an denvalijen a ioa eun nebeud diminuet. Lod euz ar Juzevien a ioa chommet en dro d'ar groaz, kerkent a ma zeo tremenet ho spountaden, a deu da veza ker goaz ha biskoaz. Mont a reant da c'hoarzin goap da Jezus, e kreiz he angoni.

« Gervel a rea Eliaz, emezho ; ni'velo ag Elias a deui d'hen delivra ! »

Jezus en doa neuze eur zec'hed diremed ; ar pezh a zo unan euz ar poaniou brassa a ell da gaout ar re a zo stag ouz ar groaz.

An diabarz anezha a ioa dizec'het ; he deod a ioa stag ouz he staon. Klevet a rejot eur vouez e lavaret gat eun huanaden klemmuz « *Sitio* » sec'hed am euz. »

E traon ar groaz, e zoa eur pod leun a vin-egr. Unan euz ar zoudarded a zoubas enna eur spouen, her lakeas e beg eur gorzen hag her c'hinnigas da Jezus.

Jezus a gemeras eur veraden evit lakaat da veza guir ar pezh en doa lavaret ar profed David : « Evit terri d'in va zec'hed, o deuz roet d'in guin-egr da eva. »

Jezus en doa evet he galir beteg al lii. Great en doa, penn-da-benn, bolontez he dad. Lakeat en doa da zeveni kement o doa lavaret ar brofeted di-var he benn ; paet en doa evit pec'hejou ar bed. Neuze e ped ar maro da zont « *Consummatum est* : Echu eo va labour. »

An dud, pa glevont ar c'homzou-ze, a laka muioc'h a evez c'hoaz ouz Jezus. He gorr a zislivas : he benn kurunet a spenn a guezas en eun taol var he beultrin ; he vuzellou n'o devoa mui a

liou ; he zaoulagad a ioa maro. Edo e vont da den-
na he huanaden diveza, pa zavas souden he benn,
ha ma laoskas eur griaden ker krenv ma chommas
an holl strafillet. N'oa ket ounnez huanaden klem-
muz an den a zo e vont da vervel, mez kri a
driomf eun Doue ag a lavar d'an douar : « Mervel
a ran, abalamour ma fell d'in mervel. A-dreuz he
vuzellou benniget, digor evit ar vech diveza, e teu
ar c'homzou kaer-ma :

« Va zad, emezha, etre ho taouarn e lakaan va
ene. »

Goude ar c'homzou-ze, Jezus a stouas he benn
hag a varvas.

D'an heur-ze, edot en templ e kinnig an oan pas-
kal, e sakrifis. Mez ar guir oan paskal, an oan en
deuz sammet var he ziouskoaz holl bec'hejou ar
bed, ha lakeat an diaoul da dec'hët, oa oan ar
C'halvar. Eüruz ar re a zoug ar merk euz a c'hoad
an oan-ze !



VI.

MARO JEZUS.

PA varvas Jezus var ar groaz, ar bed-holl
a zeblandas trei var an tu enep. Iouaden
diveza hor Zalver en he angoni a ieas
beteg ar goueled hag a zivorfilas peb tra
krouet. An douar a orjellas evel pa ne vije mui
oc'h he harpa an dourn e doa he grouet ; ar reier
a faoutas dre'n anter. Roc'h ar C'halvar zo-ken,
roc'h kroaz hor Zalver a rannas penn-da-benn. E
traonien denval Josafat, kalz beziou a zigoras ha
kalz tud varo, savet da veo, a ieas da vale dre ruiou
Jerusalem gat ho linseriou en-dro dezho hag a roe
spout hag enkreuz dre gement leac'h ma tre-
menent.

En templ, oa brassoc'h abaden c'hoaz. Ar veleien
a ioa neuze e laza al loened evit ar sakrifis, an oan
evit ar pask, a jommas sebezet. Ar bobl sioul a
grene hag a c'hortoze gat enkreuz peur e vije fin
d'an abaden-ze. Kerkent, e klever trouz e tu al
leac'h santella euz an templ. An holl a dro ho da-
oulagad var ar goel a zisparti ar rest euz an templ
dioc'h al leac'h santella, al leac'h-se ne d'ea den
ebarz nemed ar belek braz, ha c'hoaz, eur vech

ebken er bloaz. Ar voel misteriuze-se a rannas e daou adalek an neac'h beteg an traoñ. Evel-se e koeze d'an traoñ an allians koz evit ober plass d'an allians nevez. — Beleien, paouezit brema da laza loened a n'oant nemed eur figur, eur skeud. Ar guir viktim, an hini ebken a blij da Zoue, c'hui a zo e paouez he laza var ar C'halvar ! Bobl, selaout ! Ar seiz ha tri-ugent sizunvez merket gat ar profed Daniel a zo tremenet. Selaou-mad ! « Goude dek sizun ha triugent, ar Messias a vëzo lakeat d'ar maro. He bobl a droio kein dezha ha ne vezo ket mui he bobl. An hosti hag ar sakrifiks a baouezo. An drubuilh ar vrassa a vezo en templ ha padout a rei beteg ar fin. » « Muntrerien Doue, dirak ar voelze roget gat dourn Doue, lakit evez eta oc'h komzou ar profed ! »

Gouskoude, epad an amzer ankeniuz-se, var menez Kalvar, an dud a ioa sioul. Ne glevet nemed, a amzer da amzer, kriadennoù klemmuz an daou laer en ho angoni. Pa oue maro Jezus, ar gragez santel hag an abostol Iann a ieas eun nebeud a gostez gat ar Verc'hez Vari. Dirak ar groaz e c'homme ar c'hantener gat he zoudarded. En he za dirak ar groaz, ne denne ket he zaoulagad divar hor Zalver. Ar iouaden diveza laosket gat Jezus a dinte c'hoaz en he skouarn, hag an holl burzudou great gat Jezus d'he varo a c'hounezas he galoun. Lavaret a rea a vouez huel da gement-hini a ioa c'hoaz var menez Kalvar :

« An den-ze a ioa eun den mad ; e guirionez, map Doue oa. »

An dud a ioa bet test eno evel da, evel pa vije skoet eun taol pounner var ho c'haloun, a iea d'ar

gear en eur skei var ho feultrin hag en eur lavaret :

« E guirionez, hennez oa map Doue. » E strad an iññ, ar memez iouaden a ioa bet klevet. Pa denis Jezus he huanad diveza, Satan a velas oa fazet. Hen eo a ioa bet e sevel ar Sinagog a enep an den Just, hag an den just-ze oa map Doue. Dallet gat ar gounnar, en doa great lakaat d'ar maro an hini a roe dre he varo ar vuez d'ar bed holl. Satan, eb her gouzout, en doa labouret da redampcion bugale Adam, ar vugal igou-ze a grede Satan pladet evit biken dindan he dreid.

« Map Doue oa, a lavar gat dizesper, ha me a meuz great vad dezha, eb gouzout. »

Ia ; map Doue oa. D'ar poent-se, ene Jezus, disparti diouz he gorr, a ziskennas d'al limbou, d'al leac'h misteriuze edo enñha bugale Doue abaoe meur a gant vloaz e c'hortoz he zonedigez hag ho delivrans. Eno edo ar batriarched hag ar profeted : Adam, Noe, Abraham, Moizes, David, hag an holl dud santel a c'hortoze ho Zalver hag o doa lakeat ho fizians enñha. Pa ieas ene Jezus e palez dudiuz ar zent-se, ne oue nemed eur c'hri : « Hen eo. Setu e guirionez map Doue. » Ar memez kri oa evel a ioa bet var ar C'halvar hag en ivern.

Etretant, soudarded kaset gat Pilat, a bigne sioul-braz var menez Kalvar. Ar Romaned, a ioa ar c'hiz gatho da lezer da zispenn gat al laboused gouez ar c'horfou a vije maro ouz ar groaz. Mez lezen ar Juzevien a zifenne outo ho lezer a zispill ouz ar groaz goude kuz-heol. Evel ma oa ar zabbat e vont da zigeri, hag evel ma zoa ar zabbat, er blavez-se, kaerroc'h c'hoaz abalamour ma koeze

assamez gat ar Pask, oa mall dezho miret ar peza
ioa merket el lezen. Prinsed ar veleien o doa peget
eta Pilat da lakaat rei an taol diveza d'ar re a pa
ouz ar groaz evit ma c'heljet tenna ho c'horvu
kuit. Setu perak e velet soudarded romen e pignat
var ar Golgotha gat mellou ersier.

Tostaat a rejont ouz unan euz al laeroun ha gat
an orz houarn e vruzonont dezha he zivesker hag
he beultrin. Ober a reont kement all d'an eil laer.
Mez pa erruont gat Jezus, dioc'h he gaout ken
droulivet, stouet gatha he benn, hag he vempru
krizet, e veljont er-vad oa maro eur pennad a iad.
Ne dale ket ar boan eta bruzuna dezha he zives-
ker. Gouskoude, evit beza direbech, eur zoudard a
zigoras he gostez gat al lans. Al lans-se a dizas
beteg ar galoun hag euz ar gouli e teuas dour ha
goad. Evel-se, e teuas da veza guir evit Jezus, ar
pez a vije great d'an oan paskal : « Ne dorroc'h hi-
ni euz he eskern.

An diskib muia karet, Iann, e kreiz ar gragez
santel a velas gat he zaoulagad kement a dremen-
as eno hag a rentas testi d'ar virionez. Guelet a
reas e tont dre ar gouli an dour hag ar goad. Gue-
let a reas ar galoun-ze digor evel eun or da lezer
da zont beteg ennomp sakramantchou an iliz. Ar
goad a redas da baea evit hor pec'hejou ; an dour a
redas evit goalc'hi hon-eneou. Dour ar vadiziant
ha daelou ar binijen a zo en eun tu ; hag en tu all,
er goad ema magadurez an eneou dre zakramant
an Aoter. Iann a velas ; hag, eur vech c'hoaz, e
rentas testi euz ar pezh en doa guelet, evit lakaat
er c'halounou feiz kreñv ha karantez.

Ar zoudarded, evit echui ho dervez, a ioa e vont

da zistaga ar c'horvou ha da lakaat anezho en
douar gat ho c'hroaz. Setu ma teu daou zen d'ho
c'laout da c'houlou korv Jezus.

Unan anezo a ioa euz kear Arimathii ; Josef oa
he hano. Euz a renk huel oa ha, zo-ken, euz a gon-
seil braz ar Juevien. Eun den eeun oa, douss ha
mad. Morse n'oa falvezet dezha mont a-du gat he
gonsorted er prosez o doa great da Jezus. Diskib
d'hor Zalver, mez e kuz, e klaske hag e c'hortoze
romantelez Doue. Ar spount a roe ar Juevien d'an
holl en doa miret outha beteg-henn da ziskues he
feiz. Mez ar galounad en doa bet var menez Kalvar
a bellaas dioutha peb aoun hag a roas dezha ke-
ment a hardisegez ma sonjas, goude maro hor Zal-
ver, he zebelia en eur fessoun deread. Mont a ra
eta bete Pilat da c'houlou digatha korv Jezus. Ar
gouarner romen en doa kalz rebechou da ober de-
zha he unan, divar benn Jezus hag he vignouned.
Setu perak e roas raktal dezha he c'houlou, gat ma
vije evesseat mad araok a maro oa ar c'horv. Rak
Pilat a ioa estounet e vije maro Jezus ker buhan.
Kemen a reas eta d'ar c'hantener dont d'he gaout ;
hag, evel ma lavare hema oa maro mad, e roas
urz da rei ar c'horv da Joseph.

Assamez gat Joseph, oa Nikodem, an doktor-ze
euz al lezen, a ioa bet tri bloaz araok, e tiviz gat
hor Zalver, ha n'hen doa ket ankounac'heat he
vestr nak ehanet d'he zifen a enep an holl geier a
zavet en he enep.

Epad m'edo Joseph e klask eul linser da zebelia
ar c'horv, Nicodem en doa digasset a bep seurt
louzeier a c'hoez-vad, tost da gant lur, evit he val-
zami.

Gat sikour Iann hag eun nebeud diskibien all, Joseph ha Nikodem a ziskennas korv Jezus diwar ar groaz. Ar gragez santel a velas eno, e stad a varo, ar mestr o devoa heuliet gat karanvez. Eno, Mari a ellas briata c'hoaz he map ha goalc'hi he c'houlou gat he daelou. Mez, erru eo an alardaez. Ar zabbat a zo e vont da zigeri. Red eo buhan-ha-buhan he zebelia.

Joseph a ledas var ar mean al linser a ioa deuet gantha. Ar c'horr' oue astennet varnhi, ha goude beza goalc'het ar goad euz he c'houlou, oue taolet varnha al louzeier a c'hoez-vad. En dro dezha oue lakeat seizennou, ervez giz ar vro, ha var gorre oue lakeat al linser da c'helei ar mestr muia karet!

E kichen al leac'h m'oa bet krusifiet Jesus, e zoa eur jardin ag a ioa da Joseph a Arimathii. Eno, oa nevez kleuzet eur bez er roc'h ha n'oa bet c'hoaz lakeat den enna. Joseph a oue joa gatha he rei evit sebelia he Zalver hag he vestr. Ar bez a ioa braz. Diou gampr a ioa enna hag e zeat euz an eil d'eben. Kleuzet oa e kreiz ar roc'h. Er gamprrik pella, en eun toull kleuzet ed-a-ed ar roc'h, oue lakeat korv Jezus. Mari Madalen hag ar gragez santel o doa evesseat mad e pe leac'h oa lakeat. Rak sonj o doa da zistrei d'ar bez evit renta da gorr hor Zalver muic'h a henor; rak ar pez o doa great, a ioa great dre brez. Goude beza rentet ho deveriou diveza d'ho mestr, an diskibien a ruillas eur mean braz evit stanka dor ar bez, hag e tistrojont da Jerusalem, ho c'haloun mantret, an daelou en ho daoulagad, hag ho ene holl-bruzunet dindan ar bouez euz ho glac'har. Mari hag he c'hompagnunez a renkas ive kuitaat ar C'halvar evit mont da dremen er gamblid dervez ar zabbat.



VII.

REZURREKSION.

DEIZ ar Pask oa ; deiz a levenez evit ar Juezvien ! deiz a dristidigez evit diskibien Jesus ! Allaz ! evitho-holl, Jezus a ioa kollet. Fall-galouni a reant. Ne oa nemed ar verc'hez Vari ag a vije bepred leun a fizians. Hini euz he ziskibien, n'e deue da zonj dezha euz ar pez en devoa lavaret ken aliez a vech ar mestr divin, e vije savet leun a vuez euz ar bez da benn an trede deiz goude he varo, hag en dije savet he rouantelezh dre ar bed-oll. Goude m'o doa gullet he bassion, an dismegans, an injustissou, ar blasfemou, hag he varo var ar groaz, n'o doa ket mui an disterra esperans hag edont evel eun torrad tud digaloun.

Ar gragez santel ne ehanent da ouela var ar mestr mad a ioa tennet digatho gat ar maro. Ho c'haloun a ioa e kichen he vez, ha mall braz o doa da velet fin ar zabbat evit gellout distrei d'ar C'halvar ha perechui d'he zebelia gat ar brassa henor. Evit kement-se o devoa prenet louzeier a c'hoezvad, ongant a briz evit perzebelia hor Zalver.

Prinsed ar veleien hag ar Farizianed n'oant ket

ken dizont na ken ankounac'hauz ag an diskibien. N'oant ket bet eb kaout eun nebeud enkrez var bouez ar C'hrusifiet. Eb mar, Jezus a ioa maro ha sebeliet. Mez, a n'hen doa ket lavaret aliez e vije savet euz an douar d'an trede deiz ? Ar miraklou en deus great epad he vuez, an traou estounuz tremenet epad m'edo e vervel var ar groaz, a elle lakaat e penn he ziskibien touellet gatha ar zont hag ar c'hoant d'he laerez. Red eo eta diouall outho. Eb respet evit deiz ar zabbat, setu an dud-se, leun a gassouni, a ia da gaout Pilat hag e lavaront dezha : « Aotrou, sonj on beuz en deuz lavaret an trompler-ze, en dra ma oa c'hoaz beo, e vije d'an trede deiz savet a varo da veo. Grit eta ma vezo diouallet mad ar bez, gat aoun na deuffe he ziskibien d'he laerez ha da rei da gredi goudeze d'ar bobl eo savet e guirionez a-douez ar re varo. Ar falz kreden diveza-ma a vezo kalz goassoc'h eget ar genta. »

Pilat en doa drouk ouz an dud-se. Ne elle ket ho gouzaon abaoe m'o doa her lakeat da vont a enep he goustians ha da varn d'ar maro eun den div-lamm.

« Goardou o c'heuz, emezha, it ; ha diouallit-hen, evel ma karfoc'h. »

Mont a rejont eta d'ar bez. He stanka a rejont kloz. Siella a rejont ar mean golo ha goardou a lakejont varnha d'hen diouall. Goudeze, e tistrojont d'ar gear, dinec'h. Rak ne elle ket tec'het digatho eur c'horv diouallet ker mad ha ker kaer prizouniet.

Mez e pe leac'h emaan dud a ell beza treac'h da Zoue ? E pe leac'h ema ar mean siellet stard aualac'h evit hen derc'hel er bez ?



D'an trede dervez, e ser goulou deiz, d'ar poent merket gatha he unan, Jezus a lakeas adarre he ene en he gorf hag a zavas leun a vuez euz ar bez. Ar zoudarded n'o devoa ket gouezet da be vare ha ne ouient ket zo-ken edont e tioual eur bez goulo. Setu, en eun taol kount, e c'hoarvezas eur c'hren douar kreñv. Eun eal a-berz an Aotrou a ziskennas euz an envou dirak ar gouardou strafillet. Sevel a reas ar mean lakeat da stanka ar bez hag ec'h azezas varnha evel var eun tron. He visaj a ioa evel eulluc'heden hag he viskamant a ioa guenn-kann evel an erc'h. He zaoulagad a laoske flammou tan hag ar zell a ra var ar zoudarded a ra dezho kement a spount ma koezont a stok-ho-c'horv d'an douar.

Jezus a ioa treac'h d'ar maro ha treac'h d'an ivern hervez m'en doa her lavaret.

Goude ar pennad enkrez-se, ar zoudarded a zisken e kear evel tud follet. Mont a reont da gounta da brinsed ar veleien an traou estlammuz o doa gullet. Ar re-ma, e leac'h anaout ar virionez, e leac'h anzaou galloud burzuduz Jezus, ne glaskont nemed an tu da vouga ar virionez. Galvet oue rak-tal tud ar c'honseil da rei ho aviz. Ne gavchont netra guelloc'h da ober eget gounid ar goardou dre forz arc'hant hag ho lakaat da embann, dre gear, dirak ar bobl, e zoat bet e laerez Jezus epad ho c'houk. He ziskibien, emezo, o deus great an taolze. Aoun o doa ive gouskoude da veza tamallet gat Pilat abalamour n'o doa ket great ho dever. Mez ar c'honseil a lavaras dezho en hem garge euz ar gouarner. Ar zoudarded-se, neuze, goude beza paket kalz arc'hant marc'had mad, a vrudas dre

gear oant kousket-mik pa oa bet diskibien Jezus oc'h he laerez. Lod tud a ioa sot aoualac'h evit kredi. Gouskoude, penaoz kompren o deffe an dud-se guelelet laerez ar c'horr, mar d'oant kousket evel a lavarent ?

« Mar d'oac'h kousket, eme Sant Augustin, penaoz o c'héuz-hu guelelet laërez ar c'horr ? Ha mar d'oac'h dihun, petra e deoc'h n'oc'h euz ket miret he laerez ? »



VIII.

JEZUS HAG AR GRAGEZ SANTEL.

ANTRONoz ar zabbat, mintin-mad, oa prez var tud ar gambr-lid, né ket da vont da laerez, mez da vont da valzami korv Jezus. Da c'houlou-deiz, d'ar poent m'edo ar goardou spountet e tec'het dioc'h ho fost, an teir Mari : Mari Madalen, Mari Kleofaz ha Mari Salome, a ioa e vont er meaz a Jeruzalem etrezek ar C'halyar. Mont a reant d'ar bez gat podou louzeier a c'hoezvad evit he valzami en eur fessoun deread. N'oant ket gouskoude dinec'h aoualac'h. Piou, a lavarent entrezo, a ruillo divar hon hent ar mean braz a zo e stanka ar bez ? Mari Madalen e doa kement a vall da erruout ma zeas d'ar red araok an diou all. Peger sebezet eo, pa vel ar mean diblasset hag an or digor-frank ! Sonjal a ra eo laeret korv Jezus ha setu hi da zistrei divar-err, d'ar gambr-lid, da lavaret d'an ebestel petra e doa guelelet. « Laeret o deuz korv va mestr, emezhi, ha ne ouzoun ket e pe leac'h o deuz her lakeat. »

Etretant an diou c'hreg all a erru ive er bez. Mont a reont er gamprik oa bet lakeat ennhor Zalver. A-zeou e kichen ar bez, e velont eun eal

ker kaer ha ker skeduz ma zint strafillet. An eal neuze a lavaras dezho : « No pezet ket aoun. C'hui a zo e klask Jezus, ar C'hrusifiet. N'ema mui ama. Savet eo a varo da veo. It eta da lavaret d'he ziskibien ha da Ber ema e vont d'ho gortoz er Galilee. Eno e vazo gueleet adarre, hervez m'hen deuz lavaret. »

An diou c'hreg à grene gat ar spount hag a oue mall gatho distrei d'ar gear eb lavaret grik da zen.

Per ha Iann, pa glevchont komzou Madalen, a ieas assamez gathi d'ar bez. Mont a reant affo. Iann, iaouankoc'h ha skanvoc'h eget Per, a éruas da genta. Astenn a reas he benn da ober eur zell en diabarz. Mez gortoz a reaz evit mont er bez ma vije eat Per en he raok. Neuze e zejont o daou da velet a-dost petra'ioa c'hoarvezet. Gueleet a reont ar seizennou en eun tu, al linser en eun tu-all, pleget disparti. Kredi a reont evel ar Vadalen eo laeret ho mestr.

Doue a fellas dezha n'ho dije ententet netra neuze er Skritur-Sakr a ioa gouskoude ker sklear. Merket oa ennhu sklear aoualac'h e tlie Jezus, d'an trede deiz, sevel a douez ar re varo. Setu ma tistroont souezet ha nec'het-mar o klask kompren petra oa deuet Jezus da veza.

Mari-Madalen ne fellas ket dezhi kuitaat ar bez. Chomm a ra eno da bedi, da ouela ha da zonjal e pe leac'h e c'helfe beza kuzet korv he mestr. He daoulagad beuzet en daelou, e c'hastennas adarre he fenn evit evessaat guelloc'h, e diabarz ar bez. Neuze e vel daou eal guisket e guenn, el leac'h ma oa bet lakeat korv Jezus. Unan a ioa e plass ar penn, hag egile e plass an treid.

« Maouez, emezo, perak e ouelit-hu ? Piou a glaskit-hu dre-ama ? »

Jezus a ioa eno.

Mez Madalen n'hen anaveze ket. Her c'hemeret a reas evit ar jardiner, ha gat ar c'hoant e devoa da gaout he mestr. e lavar dezha : « Va den mad, mar d'eo c'hui o c'heuz her c'hasset ganeoc'h, lavarit d'in e pe leac'h o c'heuz her lakeat, evit ma zin d'he gerc'het. »

Neuze gat eur vouez douss hag a ia bete goeled ar galoun, Jezus a lavar dezhi : « Mari ! »

Kerkent, Mari hen anavez : « *Rabboni*, va mestr mad, » emezhi ; ha leun a joa e koez d'an douar hag e pok da dreid hor Zalver. Madalen e doa evel aoun d'he goll adarre. Mez Jezus a lavaras dezhi : « Lezit ac'hanon, emezha, n'eo ket deuet va heur da bignat varzu va zad. Brema, it da lavaret d'am breudeur e pignin a benn-nebeud bete va zad hag ho zad, bete va Doue hag ho Doue. »

Setu penaoz en hem ziskuezas, da genta, d'ar bec'herez paour-zê, hen devoa bet kasset seiz diaoul euz he c'hory. Mez abaoue neuze, nak a garantez savet e kaloun Madalen evit he mestr mad !

Jezus a fellas ive dezha diskuez anaoudegez vad d'ar gragez all a ioa eat d'he heul bete menez Kalvar. Jeanne, pried Kuza, ha merc'hed alleuz ar Galilee, eb gouzout oa bet an teir Mari er bez, a ioa e vont di var-dro sao-heol gat podou louzeier. Nec'het oant ive divar benn ar mean braz a ioa lakeat da stanka dor ar bez. « Piou a ruillo ar meanze d'eomp ? a lavarent. »

Peger laouen int pa velont ar mean-ze ruillet hag ar bez digor frank d'an holl. Mont a reont en dia-

barz. Klask a reont korv Jezus. N'ema mui eho. Ne ouzont petra' da zonzal pa deuas dirazho daou eal, guenn-kann guisket. Setu int-hi e krena gat ar spount. Mez unan anezho a lavaras : « Merc'hed, ne grenit ket evel a rit. Me' oar e maoc'h e klask Jezus a Nazareth, maro var ar groaz. Ne glaskit ket e touez ar re varo, unan ag a zo beo. Resussitet eo evel m'hen doa her lavaret. Digassit da zonz en ho spered euz ar pezh en devoa lavaret deoc'h er Galilee. « Map an den, emezha, a ranko beza lakeat etre daouarn ar bec'herien. Hogen, d'an trede deiz e savo a varo da veo. »

Neuze, e guirionez, e teuas da zonz dezho euz ar pezh en devoa Jezus-Krist diskleriet ker sklear.

An eal a lavaras goude : « Tostait, ha guelite pe leac'h oa bet lakeat an Aotrou. »

Ar merc'hed a dosteas beteg ar penn pella euz ar bez hag a velas er-vad oa goullo. Ne jomme eno nemed lianennou hag al linser a ioa bet en-dro d'hor Zalver.

Brema, a lavar dezho eal Doue, distroit buhan da Jeruzalem. Lavarit da ziskibien Jezus eo beobuezek hag e za da c'hortoz ac'hanoc'h d'ar Galilee. Eno, c'hui holl her guelo, hervez m'hen deuz lavaret.

Ar gragez santel a deuas er meaz, spountet eun nebeud ha gouskoude ho c'haloun leun a joa. Edont e vont d'ar red da gass ar c'helou-mad-ze d'an diskibien pa ouent dalc'het a-za gat eur goaz.

« Bonjour, merc'hed, emezha gat madelez. »

Jezus oa. He anaout a rejont ha setu hi e c'harz he dreid evit ho briata. He adori a reant gat karanterez evel ho mestr hag ho Doue.

Jezus ho zrugareka ; hag araok dispartia dioutho e lavaras dezho : « No pezet ket aoun ; mezh it da lavaret d'am breudeur mont d'ar Galilee. Eno e velint ac'hanon. »

An ebistel a ioa e tiviz etrezho divar ar pezh a ioa erruet, pa ziouezas Mari-Madelen, distro euz ar bez hag he c'haloun leun a levenez. Lavaret a ra kerkent a ma za er gambr-lid : « Me' meuz gullet ar mestr ha setu-ama ar pezh hen deuz digasset ac'hanon da lavaret deoc'h. »

Mez kaer e doa lavaret hag assuri oa Jezus beo, e doa her gullet gat he daoulagad, her c'hlevet gat he diskouarn, ne felle ket dezho kredi. — Edont c'hoaz e komz etrezho, pa ziouezas ar gragez santel. Lavaret a reont piz ha piz kement o deuz gullet ha klevet. Mez an ebistel diskredik a c'hoarze dezho, a c'hoapea anezho hag ho hanve pennou skañv, pennou avelet.

Setu petra' basseaz e Jerusalem, er penn kenta euz an deiz-se. Jezus a fellas dezha en hem ziskuez da genta d'ar merc'hed santel, abalamour epad he bassion o doa diskuezet muioc'h a garantez ha ma zoant eat d'he heul bete menez Kalvar, epad ma oa eat an darn vuia euz an ebistel da guzet gat aoun rak ar Juzevien. Ar gragez-se oue karget da lavaret d'an ebistel oa savet Jezus euz ar bez. Ag an ebistel dall, aheurtet, a jommas diskredik, dre bermission Doue, beteg ar moment ma vezint ho unan test euz he rezurreksion.



IX.

JEZUS HAG AN EBESTEL.

GOUDE beza-klevet testeniou ar merc'hed-se, daou euz an diskibien, diskredik ha fall-galounet, a lakeaz en ho fenn distrei d'ar gear araok an abardaez. Petra o doa-hi da c'hortoz e Jeruzalem nemed goal oberou a-berz ar Juzevien, prizoun, maro marteze. E chomm oant en eur bourkik hanvet Emmaüs, div heur vad a vale dioc'h Jerusalem. Eno, da vihana, n'o devezo trabas oc'h den hag e c'hellint ankounac'haat ar poaniou c'huero o deuz bet. Setu int-hi o daou en hent, tenval ho fenn ha glac'haret. Dre ma zeant, n'oant ket evit miret da gomz euz an traou estlammuz, nevez-tremenet. Mez kaer o doa lakaat ho holl spe-red da glask gullet sklear er pezh a ioa tremenet, ne velent nemed tenvalijen. Epad ma kaozeent entrezo, setu Jezus e tostaat outho hag oc'h ober hent assamez gatho. Jezus en devoa eun dianveaz a ne c'helle ket rei da anaout piou oa.

Ar mestr madelezuz a voulc'haz kaoz gatho rak-tal. « Euz a betra e komzec'h aze, emezha, ma z'eo ken teñval ho penn ? »

Unan anezho, hanvet Kleofaz, mantret e klevet

he gomzou a lavar : « Ne dleit ket sur beza euz a Jeruzalem, ma ne ouzoc'h ket an traou a zo pas-seet eno. »

— A petra' zo c'hoarvezet ta, eme an divroad.

— Petra' zo c'hoarvezet ? Divar benn Jezus a Nazareth, an den-ze, ar profed-se ker galloudek en he oberou hag en he gomzou dirak Doue ha dirak an dud ! Gouzout a rit emichans o deuz prinsed ar veleien hag hon tud koz treinet anezha dirak an dribunal hag her barnet d'ar maro. Savet eo bet var ar groaz ! Allaz ! ni or boa lakeat hon holl fizians en dije delivret Israël, ha setu ama an trede deiz ma z'eo diouezet an traou-ma ! Evit guir, hiniennou euz hor merc'hed, o veza eat d'ar bez er mintin-ma, da c'houlou-deiz, o deus lavaret d'eomp traou estlammuz. Pa zint eat d'ar bez, n'o deuz kavet nemed plass ar c'horv. Dioc'h ho c'hlevet, o deuz gullet Elez er bez, hag an Elez o deuz lavaret dezho oa Jezus savet a douez ar re varo hag ema leun a vuez. Var ho lavar, lod ac'hanomp a zo bet beteg ar bez hag o deuz kavet e lavarent guir penn-da-benn ! Mez ar c'horv n'oa ket eno, ha n'o deuz ket gullet Jezus. »

Jezus a lavaras dezho neuze diroufen : « O tud dall ! tud kalet a galoun ha lent da gredi komzou ar profeted ! Daoust a ne ranke ket ar C'hrist gouzaon araok pignat en he c'hloar ? »

Neuze e tisplegas dirazho kement a ioa er Skritur, e leoriou ar profeted divar he benn. An daou ziskib a ioa mantret oc'h he glevet hag a zante eur joa vraz e vont bete goeled ho c'haloun. — Setu hi erruet e kear Emmaüs. Eno emaint e chomm. An tredeok a venne poursu he hent ; mez kement a rejont varnha ma chommas da breja gatho.

« Chommit ganeomp, a lavarent-hi ; setu deuet an abardaez hag an heol a zo e vont da guzet. »

Jezus a zelaouas ho feden hag a leas gatho en ti.

Hogen epad m'edont gat ho c'hoan, Jezus a gemeras bara, her bennigas hag her rannas entrezo, Kerkent ar re-ma a anavez ho mestr mad. Mez Jezus a ioa tec'het kuit.

Chommet eno ho unan, an daou ziskib a zo evel tud sebezet ha mut. A benn nebeud gouskoude e teu joa en ho c'haloun hag e lavaront an eil d'egile : « A n'eo ket guir e verve hor c'haloun en hor c'hreiz dre ma komze ouzomp a-ed an hent, dre ma tisplege d'eomp ker sklear ar Skritur Sakr ? »

Ken dispount brema a ma oant aounik diagent, Kleofaz hag he vignoun, e leac'h gortoz antronoz, a ziskennas dioc'h-tu da Jeruzalem da gass d'ho breudeur ar c'helou mad. Pa erruont er gambr-lid, e kavont eno eun niver mad a ziskibien. N'oa ken kaoz gatho nemed divar benn an traou a ioa bet c'hoarvezet epad an deiz. Lod a lavare oa Jezus aparisset d'ar gragez santel ; lod a lavare oa aparisset d'an abostol Per. Pa deuas daou ziskib Emmaüs, e lavaront ger-evit-ger ha poent-da-boent petra' ioa c'hoarvezet gatho en abardaez-se, penaoz o doa anavezet Jezus p'hen doa rannet ha benniget ar bara hag her c'hinniget dezho. Daoust d'an testeniu-ze, an ebstel o doa poan e kredi. Ne ouient petra da zonjal.

Pa deuas heur ar pred, an ebstel en hem lakeas oc'h taol, goude beza moraillet mad an doriou. Rak aoun o doa na vijent tamallet da veza laeret Jezus.

Epad m'edont gat ar pred ha ma lavare peb hini he gaóz, setu Jezus, en despet d'an doriou prennet,

e tont en ho zouez. « Ar peoc'h ra vezo ganeoc'h, emezha ; n'o pezet nep aoun : Me eo. »

An ebstel c'hoaz a gemer anezha evit eur spes, eur spountail. Setu ma rankas Jezus diskuez dezho sklear ar virionez.

— « Petra eo deoc'h beza strafillet evel-se ? Perak e lezit-hu sonjezounou ker sot da c'hounid ho kaloun ? Sellit oc'h va zreid hag oc'h va daouarn. Touchit outho hag e veloc'h eo me a zo ama e guirionez, me ho mestr ; ha me a zo e komz ouzoc'h. Eur spered n'hen deuz ket na kig nak askorn evel a velit a meuz-me. »

En eur gomz evel-se, e tiskueze dezho he zaouarn, he dreid hag he gostez digor. An ebstel a dride gat ar joa. Evel ma zoant evel trellet ha saouzanet gat al levenez, Jezus, evit diskuez skleroc'h dezho edo eno korv hag ene, a c'houlenn digatho :

« Ag eun dra bennak o c'heuz da zribi ? » Kinnig a rejont dezha eun tam pesk fritet hag eur follennel. Jezus a zrebas dirazho ; kemeret a reas ar pez a jomme euz he zilerc'h hag hen rannas entrezo.

Adalek ar moment-se, an ebstel ne mañnt ket mui var var. Kredi a reont stard ema ho mestr dirazho. Koeza' reont d'an daoulin dirazha ha kement a jalantez a reont dezha ma n'elfet ket her lavaret.

Jezus, pa ho guel kement troet varzu ennha, a ra dezho eun nebeud rebech, mez gat kalz dousder, dre ma zoant chommet diskredik, (inkredul,) keit all. Petra oa dezho n'o doa ket kredet d'ar gragez santel ha d'ar re-all o devoa digasset an testeniu kenta euz he rezurreksion ?

Goudeze, en eur gomz outho euz he bassion, e lavaras :

« Epad m'edon ganeoc'h, a ne m'euz-me ket lavaret deoc'h, meur a veach, e ranke dont da vir kement a ioa skrivet divar va fenn e leoriou Moïzes, e leoriou ar profeted hag er Psalmou ? »

Digeri a reas dezho neuze ho spered evit rei dezho da gompren ar Skritur hag e lavaras : « Skrivet eo, hag evel-se oa red en dije ar C'hrist gouzanvet, e vije d'an trede deiz savet a varo da veo, hag e vije ar binijen hag ar pardon euz ar pec'hejou prezeget en he hano dre an holl broiou, mez da Jeruzalem, da genta. C'hui a zo test euz ar burzudou-ma. »

Ne ket test ebken e tlie beza an ebestel euz ar burzudou great gat hor Zalver, mez e tlijent c'hoaz derc'hel he blass er bed-ma evit kass beteg an eneo ar grassou kaer hen d'euz merit. Dija, er gambr-se derc'hent he varo, hen devoa ho great beleien euz an hosti sakr. Brema p'hen deuz peurc'hreat he zakrifis evit remission ar pec'hejou, e fell dezha ober anezho beleien ar binijen, beleien an absolven.

Lavaret a reas dezho eta evit an eil guech. « Ar peoc'h ra vezo ganeoc'h ! Evel m'hen deuz va zad va digasset, me ho kass ive. » Neuze e c'hoezas varnho en eur lavaret : « Ar pec'hejou a vezo pardonet d'ar re o pezo ho fardonet dezho. Dalc'het e vezint oc'h ar re o pezo ho dalc'het outho. »

Kerkent, ar Zalver a zisparissas. An ebestel a jomme sabatuet ha mantret. Hogen, Thomas, unan euz an daouzek, n'oa ket assamez gat ar re all pa oa bet Jezus en ho zouez. Pa zistroas, oue mall gat an ebestel lavaret dezha :

« Ni or beuz guelet an Aotrou ! » Thomas a ioa gourtoc'h c'hoaz da gredi eget he vreudeur. Respount a ra dezho n'hen dije kredet nemed d'he skiantchou :

« Ma na velan en he zaouarn roud an tachou, ma na lakaan va biz er gouliou, ma na lakaan va dourn e toull he gostez, ne gredin biken. »

Eiz dervez goudeze, an holl ziskibien a ioa assamez adarre er gambr-lid. An dorojou a ioa moraillet-mad, evel kustum, pa veljont adarre Jezus, en ho c'hreiz. Lavaret a ra dezho : « Ar peoc'h ra vezo ganeoc'h ? »

Neuze e za rak eeun d'an abostol pennek hag e lavar dezha :

« Thomas, sellit ouz va daouarn ha lakit ho piz ama : Tostañ ho tourn, lakit-hen e gouli va c'hos-tez, ha brema ne vezit ket diskredik, mez den a feiz. »

Thomas, leun a joa hag a garantez a lavar rak-tal :

« O va Aotrou ha va Doue ? »

Jezus en devoa great an taol-ze e kenver Thomas evit diskuez sklerroc'h c'hoaz e zoa beo-buezek.

« Thomas, emezha, kredet oc'h euz abalamour oc'h euz guelet : Eüruz a re a gredo eb beza guelet ! »

Ar bed, goude kement a desteniou, n'en dezo ket a boan e kredi. Dre-ze, Jezus en deuz lakeat da dalvezout techou fall, sperejou poud he ebestel evit lakaat ar virionez da bara splannoc'h hag es-soc'h da gredi, dre an holl broiou hag e peb amzer.



X.

JEZUS ER GALILEE.

DIOC'H-TU goude goueliou Pask, an ebestel a zistroas d'ar Galilee, hervez m'hen doa kemennet dezho hor Zalver. Er vro-ze, ken tost d'he galoun, e tlie rei dezho he gelenadurez diveza.

Eun abardaez, seiz anezho a ioa var ribl mor Tiberiad : Simon-Per, Thomas Didym, Nathanaël, Bugale Zebedee ha daou all c'hoaz. An amzer a ioa mad ; ar mor a ioa kaer. Per a lavar d'he gon-sorted :

« Me' zo e vont da besketa. »

« Ni a ia ganeoc'h, emezo holl. Pigna' reont en eur vag hag antella' reont ho rouejou. Kaer o devoue ober ha poania, ne bakchont seurt epad an noz. Deuet ar mintin, e veljont unan var an teven ag a zeblante kaout mall d'ho guelet. Jezus oa. Mez n'o devoa ket hen anavezet. Krial a reas outho evel eur mignoun :

« Ahanta ! potred ! pesket a zo ? »

— « N'or beuz ket paket eun unan, emezho.

— « Taolit ho roued en tu deou d'ar vag, emezha adarre, a-ze e kavoc'h pesked. »

An den-ze a zeblante ker guizek hag he gom-zou ken dress, ma oue sentet outha dioc'h-tu.

Peger sabatuet ouent pa veljont kement a besked e tont dioc'h-tu er roued, ma o devoue poan e ten-na anezha euz an dour.

Kaloun Iann a zivas edo eno ar mestr hag e lavaras da Ber :

« An Aotrou eo. »

Simon, pa glev komz euz an Aotrou a visk he zae d'ar red hag en hem daol en dour evit mont kentoc'h a-ze beteg ennha. An ebestel all a erruas ive prest goude gat ar vag. Rak n'oa ket ouspenn pevar c'hant troatad dioc'h an douar. Chacha' reant d'ho heul ho roued leun a besked.

Kerkent a ma zint deuet var an teven e velont tan elumet, ha var an tan eur pesk e c'hrilla hag, e kichen, eur bara.

Jezus a bedas anezho, ker brao ha tra, da zont da breja gatha. « Digassit, emezha, lod euz ar pesked braz o c'heuz paket. »

Per a ieas d'ar red d'ar vag, ha pa oue tennet ar roued d'an douar, oue kavet ennha ouspen kant anter kant a besked braz, hag en despet da-ze ne dorras ket eun neuden er roued.

Jezus a lavaras dezho neuze :

« Tostañt ha drebit. »

Setu hi holl en-dro d'an tan. Evel guech-all, ar mestr mad a gemeras bara hag hen rannas etrezo, evel ma rannas ive ar pesk. Hogen ne zeblantent ket beza mui mignouned evel diagent. Ne oue ket unan e touez an diskibien e kredi goulenn digatha hag hen oa ar mestr. Chomm a reant holl sebezet ha var c'hed m'hen dije diskuliet he volonteiz.

Hogen, deuet oa ar poent da *droni* Per evel ar penn euz an Iliz katolik. Setu eta goude ma zeo echu ar pred, Jezus a gomz oc'h an abostol Per hag a c'houlenn digatha.

— « Simon, map Jonas, a karet a rit ac'hanon muioc'h eget an dud-ma ? »

Per a deuas da zoni dezha euz he fougasserez er Jardin Olivet. Guelet a ra pegen dibarlet oa bet ; stoui a ra dirak Jezus hag e lavar dezha :

« Aotrou, c'hui oar er-vad ho karan. »

— « Diouallit va oanet, a lavar dezha Jezus. »

Goudeze, evel p'hen deffe aoun n'en deffe ket lavaret an traou sklear aoualac'h, hor Zalver a c'houlenn adarre : « Simon, map Jonas, a karet a rit ac'hanon e guirionez ? »

Jezus ne c'houlennet ket mui digatha a karet a rea anezha muioc'h eget he vreudeur ; mez ag he garet a rea e guirionez ?

Per a oue glac'haret gat ar goulenn-ze hag a respontas a dreuz he zañlou :

« Aotrou, c'hui a oar pegement ho karan. »

Jezus a lavaras dezha adarre ;

« Diouallit va denved. »

Daoulagad Jezus a bare var Ber hag evit an drede guech e c'houlennas digatha :

« Simon, map Jonas, a karet a rez ac'hanon a galoun ?

— « O, Aotrou ! C'hui a oar peb tra ! C'hui a oar eta pegement ho karan. »

— « Diouallit va danvadezed, eme Jezus. »

An denved hag an danvadezed, an oanet hag ar bastored a ioa lakeat en taol-ma dindan galloud Per, gat an Doue, mestr da bep tra.

Per, pa glevas kement-se, pa glevas oa lakeat da bastor var an holl, da vikel da Zoue var an douar, a velas er-vad perak en doa he vestr goulennet digatha tri desteni a garantez. Siouaz ! Teir guech en doa nac'het he vestr mad epad he basion. Oh ! En dro-ma, Per, a greiz kaloun, a ioa prest da c'houzaon, da vervel evit he vestr, evit savetei dezha an eneou en deuz prenet gat ar priz euz he c'hoad. Mez Jezus n'her lezas ket da vont re hir.

« Selaouit, emezha ; pa oac'h bihan, e stardec'h ho kouriz oc'h unan hag e zeac'h el leac'h ma karriec'h. Eun deiz a deul, pa vezoc'h koz, c'hui a astenno ho taouarn ; eun all a stardo deoc'h ho kouriz hag a gasso ac'hanoc'h el leac'h ne felle ket deoc'h mont... »

Jezus, dre ar c'homzou-ze, a zinifie da Ber he verzerenti. Per a vel eta pell araok an ereou lakeat en-dro dezha, ar vourrevien e stleja anezha d'ar maro, he zivrec'h astennet ouz ar groaz. Abalamour ma lavare Jezus mont d'he heul, Per a ia var roudou he vestr, laouen da c'houzaon poan evitha.

Gouskoude, eun nebeudik var holerc'h, e teue an diskib karet gat Jezus. Mignoun Jezus oa ha var he galoun oa bet harpet evit pred ar iaou-amblied. Hen ive en devoa goulennet goustadik digat he vestr piou a dlie her guerza. Iann a ioa boazet da veza gat Per ha ne dec'he dioutha. Per a zavas c'hoant gatha gouzout a Iann a drêmenje dre ar verzerenti evel dha. Lavaret a ra da Jezus :

« Ag hema, Aotrou, petra'reoc'h anezha ? Jezus ne roas ket dezha eur respont freaz :



XI.

JEZUS À BIGN EN ENV.

JEZUS en devoa peure'hreat he labour var an douar. Dre ar gelennadurez hen doa roet, dre he skoueriou-mad, en devoa savet rouantelez santel an eneoù. Ar Juzevien o doa her staget ouz ar groaz, var zigarez m'hen doa lavaret oa ar Messiaz prometet d'ho zadou koz ha guir vap da Zoue. Goude beza lennet he istor, ar bed holl a en hem zavo oc'h ar Juzevien hag ho leshanvo muntrerien Doue. Ouspenn-ze, Jezus en deus savet he iliz. Hanvet en deuz eur mestr; ha micherourien en deuz kavet ive da zougen he hano hag he aviel dre bevar c'horn ar bed. Eun dra a jomme c'hoaz gatha da ober: Rei he spered, da lavaret eo, lakaat ar Spered Santel da zisken var ar re hen doa dibabet, ar Spered-se a gomze dre he c'hinou hag a rea burzudou dre he zaouarn.

Hogen, evel hen devoa lavaret meur a vech d'he ebestel, ne dlie digass dezho ar Spered Santel nemed goude ma vije azezet var he dron a c'hloar. Ar Spered-se pa ziskenno a roi dezo nerz ha galloud da ober penn-da-benn ho labour a vissionerien.

Daou-ugent dervez eta goude he Rezurreksion,

Jezus a zastumas he ebestel e Jerusalem, er gambr-lid, el leac'h ma oant bet e preja derc'hent he varo.

Eur vech c'hoaz, e teuas da azeza gatho oc'h taol evit ho c'honforti ha renevezi dezho ar bro-messa hen doa great n'hen dije biken ho dilezet. Erfin, e lavar dezho o dije resevet ar Spered-Santel, eb dale.

Hor Zalver ho c'hassas neuze e meaz kear, varzu Bethanii. Erruout a rejont prest goude var gern menez Olivet. Ac'hano, ke zaoulagad a vele, evit ar vech diveza, kerik Bethleem, al leac'h m'oa gannet en eur c'hraouik dister; guelea reant ar Galilee, a garrie kement. Rak eno oa bet savet hag eno en devoa prezeget. Erfin, guelea a ra Jeruzalem, ar gear trubard e doa her barnet hag her lazet var ar groaz. Evel eun daolen euz he vuez, a dremene dirak he zaoulagad.

Goudeze, dreist ar mor braz, lagad Jezus a vel broiou ar c'huz-heol, el leac'h ma tie he ebestel mont a ben-nebeud da brezeg he hano benniget ha da blanta he groaz santel, e Rom, var beg ar C'hapitol.

Varzu ar broiou-ze a-bell, e vezo douget en eur vag dister he vignounded a Vethanii: Lazar resussitet, Martha ker chentil, hag ar benitantez vraz Mari-Madalen. Er vro-ze, euz an eil kantved d'egile, tud, a vilounou, a stouo dirak an Doue a zo bet treac'h d'an ifern ha d'ar maro. Jezus a roas dezho he vennoz.

Neuze e kimmiadas dioc'h he ebestel. Sevel a reas c'hoaz he zaouarn evit rei dezho eur vech c'hoaz he venediksion. Ho daoulagad leun a zaelou a bare

varnha gat ar brassa karantez dre ma savas dirazho dre he c'halloud he unan en envou. An dud a ioa ker mantret ma na lavaret ger. Chomm a reant da zellet outha ken na deuas eur goabren d'he guzet. Dre ma chomment evel tud saouzanet da zellet ouz al leac'h ma oa eat kuit hor Zalver, daou eal guisket e guenn a deuas dirazo hag a lavaras :

« Tud Galilee, petra eo deoc'h chomm a-ze da c'hinaouegi ouz an oab ? Ar Jezus-se a zo e paouez kimmiada diouzoc'h evit mont d'an env, a en hem ziskuezo deoc'h c'hoaz. Diskenn a rei divezatoc'h er memez taill ma o c'heuz her gueleit e pignat en Env. »

Evit guir, ar memez Jezus-se, he groaz santel gatha en he zourn, en-dro dezha elez a vilionou, a ziskenno var ar memez menez-se Olivet, evit barn an holl dud, dastumet e traonien Jozafat.

Setu penaoz e c'hechuo istor glac'haruz ar C'hal-var !



TAOLEN.

	PAJEN.
I. Ar Juzevien a bourchass peb tra evit maro Jezus	5
II. Hent ar Golgotha.	9
III. Ar Golgotha.	16
IV. Staga a rear Jezus ouz ar groaz.	19
V. An teir heur angoni.	25
VI. Maro Jezus.	31
VII. Rezurreksion	39
VIII. Jezus hag ar gragez santel	43
IX. Jezus hag an ebestel.	48
X. Jezus er Galilee	54
XI. Jezus a bign en env.	60





Imprimerie N.-D. des Prés. — Ern. DUQUAT, directeur,
Neuville-sous-Montreuil (Pas-de-Calais).